

# Merc'hed Lokenole

Var eun ton anavezet

Var ton : Adieu, Portree

Merc'hedjou Lokenole, a zo merc'hed a stad (*bis*)  
Ne brizont ket a zansal, nemet gant potred vad (*bis*)

Merc'hedjou Lokenole, ha ia d'ar baluden,  
Diarc'hen, divouchouer, koef abet var ho fen.

Merc'hedjou Lokenole, ho devezs prometet,  
Monet en pelerinach, da Sant Ian beniget.

Dre c'hras an Aotrou Doue, da Sant Ian n'int ket eat,  
Rag ebars e Plougasnou, ez int bet diskennet.

Ar Person a lavare, d'ar zul en ofern-bred,  
Diwalit merc'hed iaouank gant aon vefec'h tromplet

Diwalit merc'hed iaouank gant aon vefec'h tromplet  
Dre ar c'habiten Lablond hag he vartoloded.

A merc'hed a respountas deuz a draon an iliz,  
Prezegit Aotrou Person, n'imp a reio hor giz.

He voa ket peur lavaret, na mad ar gousperou,  
Ne voa ar merc'hed iaouank, er gaer a Plougasnou.

Bars e ty Mari Beron, e zint bet diskennet.  
Ho ia dre ma voa gant-he iale'hou martoloded.

Ar merc'hedjou a drinke hag a lipe ho beg,  
Hag ar voarset a gane, ha gane en gallek.

Hag ar voarzet a gane, ha gane en gallek  
Hag ar merc'hed a c'hoarze dre ma intentent ket.

Nemet eun dortes vihan, deus ar bourg Carantec,  
Hounes voa bet ar gouant, ho tiski ar gallek.

Hounes voa bet ar gouant, ho tiski ar gallek.  
Hag a bede mil mallos, vas ar vartoloded.

Ar voarset e lavare, seder ho daou lagad,  
Da verc'hed Lokenole, arog dont d'ho c'huitad,

Ma vefen nimp intaonien, graç demp ne vefomp ket  
N'imp zeuio c'hoas eur veach, eur veach d'ho kuelel

Hag a zigasso d'eoc'hui, neuze eur chapeled,  
Ha goalennou arc'hant d'ho kamaradezet.

Merc'hedjou Lokenole, r'eur vœla lavare,  
Da Lablond ar c'habiten n'imp hor bo keuz dide.

Kenavo dide Lablond, a ia pa m'hout ho vont,  
Me garfe a greiz kalon, he vijes c'hoas ho tont.

Merc'hedjou Lokenole, a woele var ar c'hæ,  
Da Lablond ar c'habiten, allaz ! partiet he.

Lablond a zo partiet, gand he vartoloded,  
A merc'hed Lokenole, ha huanad bepred.

Lablond a zo partiet, hag eat er mes ar vro,  
A merc'hed Lokenole, a c'hortoz e zistro.

Me gred da Lokenole, ne zistroio biken.  
Ker ho devezs ar merc'hed, kavet poan hag anken.

Ker ho devezs ar merc'hed, gœla d'ezhan dourek,  
Ne zeuio ket da gaza, dezhe zomou gallek.

Rag-se-ta merc'hed iaouank a galon me ho ped,  
Ankounac'hañ Lablond, hag e vartoloded.

Ankounac'hañ Labond; hag e vartoloded.  
A bezit ive furoc'h en amzer da zonet.

A bezit ive furoc'h en amzer da zonet.  
Evit ma zoc'h bet merc'hed en amzer dremenet.

Dastumet gant VISANT COAT.